



Ar Brezel Bras



War don : Kêr Iz

An darnvuia eus ar varzed a zo aet d'ar brezel ; ar Yeodet, Dir-nador, Tal-dir, Laouik, Klaoda, Estig Kerineg, ha kant a re all ! A Drugarez Doue, e-touez ar re yaouank e sav galvedigeziou e leiz. Da e vo gant hon lennerien lenn aman da heul labour eur pôtr bihan pevarzek vloaz a gerz war roudou hon gwella barzed.

Selaouet mat hag e klevfet
Eur werz a zo neve-zavet
En mil nao-c'hant parzek, allas !
War gwasan brezel 'voe biskoaz.

Breiziz, deut da glevet ar zon,
An hini 'ra trist ar galon !
Gant eur Breton eo bet skrivet
Abalamour d'ar Brusianed.

Da viz eost, en eilvet devez,
E kouezjomp en dristidigez ;
Ar c'hleier en de-ze 'zonas
Eur c'halvalden hag a rae gloaz.

Dre ma sone an holl gleier,
An dud 'guitae o farkeier,
En eur laret an eil d'eun all :
« Allas, digor eo an tan gwall ! »

An holl a zilez o labour,
Kouls devejer ha micherour ;
Ar skolaer 'n'eus lezet e skol
Hag an aotrone vras an dol.

An dud 'n em vod endro d'ar groaz,
O c'halon tristoc'h 'vit biskoaz,
Da glevet petra 'oa 'neve,
Pe sort kelou mantrus ive.

Eur walen euzus ha dispar
A zo kouezet war an douar...
Ar c'hleier a zone dalc'hmat
Hag a rae d'an oll kalonad.

Gouela dourek 'rae ar merc'hed
Ha loden vras eus ar bôtred,
Dreist-oll ar re 'renke kuitât
Gwreg ha bugale, mamm ha tad.

Lezel a ra al labourer
Gant ar re a chomo er gêr
Labour an eost da veza graet
Gant merc'hed, tud koz, krennarded.

Ar zoudard, kent kuitât e vro,
A lavar d'ezi : « Kenavo !
Kenavo, gwreg, bugale gèz,
Amezeien ha tiegez ! »

An Aotrich he deus disklériet
Brezel da genta d'ar Serbed,
Hag evit sikour ar Serbi
E teu armeou ar Rusi.

Ar Brus a ziskleir brezel c'hoaz
D'ar Rusi ha d'ar Frans, siouaz !
Dre drubarderez hag hep poan
War hon douar e teu buhan.

Ar Brus, dre zroug ouz ar Veljed,
He deus o c'hèriou dismantret,
Dre ma ne roent sklérijen
D'è da drailha ar Fransizien.

Breiz-Veur a zo deut d'hon zikour,
Rikouret ac'hanomp war dour,
Ha kenkouls-all war an douar,
Rak he zoudarded 'zo dispar.

Galvet a zo 'barz en Bro Breiz
Ar c'hlachou 'tre daouzek ha seiz
Vit mont da ziwall al linen
Ouz droug-ober 'n enebourien.

Ar zoudarded yaouank, d'o zro,
'Zo galvet da zikour o bro
Ha tostât d'o rejimanchou,
Evel ma verk o livreou.

Kaset int war linen an tan,
'Vit hon dilenn, bras ha bihan ;
Saozon, Beljed ha Franszien,
A gerz ouz an enebourien.

Euzus ha trist eo ar brezel
Evit bugale Breiz-Izel,
D'a re 'zo pell 'zo er fosiou
O c'houzanv a bep sort poaniou.

Dindan an erc'h, ar skorn, ar glao
Hag an mindrailh nan eo ket brao ;
Hanter-veuet e-barz an dour,
An eil d'egile 'ro sikour.

Gwalleur 'n eus ar zoudard tizet
Gant bouledou 'n Alamaned,
Dreist-oll pa ve gloazet da vat
Ha harzet outan labourat.

Ya, glac'harus eo ar brezel :
Nag a Vreizad a renk mervel ?
'Vit difenn ar Frans hon bro vad
Soudarded Breiz a skuilh o gwad.

Ma varv, siouaz, war an dachenn
Ar zoudard paour 'vit hon difenn,
D'ezan eo dleet pep enor
Hag an Nenv 'zo 'vitan digor.

Ha ni aman kemeromp poan,
Sonjomp 'n hon sud a zo en tan ;
Pedomp Doue hag ar Werc'hez
Ma vo an trec'h gant hon bro gèz.

Pa vo didronet ar C'haizer,
E vo brallet an holl gleier ;
Pa deuy hon zoudarded en-dro,
Nag a levenez 'vit hon bro !

Levenez a vo 'n hon c'halon
O klevet a c'hleron o son
Evit al lore gonezet
War dreitourien Brusianed.

Mar fell d'ec'h holl klevet breman
Piou en deus savet ar werz-man,
Eur pôtr pevarzek vloaz ive,
Hanvet « Eostig ar Groaz-Neve ».

CHAPELAIN Joseph,

Ar Groaz-Nevez.